

# Dour binniget

— 131 —

(162)

War he zal gwenn, pep furnez,  
War he dremm kaer, levez,

Eur zell dispar ;

Kement he gwell o tremen

A lavar : — Eur berlezen

Dianket war hon douar !

Eur mousc'hoarz da beb-unan,

Da goz, yaouank ha bihan,

Seder, kompouez ;

Eus a bep tu, meulodi,

Adalek ma teu, dudi,

A-beurz an holl, d'ei ar vouez.

D'ar zul, pa deu d'an iliz

A-hed traouien leun a c'hliz,

Rozen veure !

N'eus komz hag a zisplegfe

He gened, nag a larfe...

Komz abed en neb doare !

An heol a-us d'an draouien,

Evned gan o c'hanaouen,

Bleuniou, dour-red ;

Eun heiez o kerzet skauv

Dindan seurt mintinvez hanv,

Tenzor kalon ha spered.

Eun devez en ti Doue,

— Kalz amzer nijet aboue ! —

En toull an nor,

Hi o tont, me o vonet

Dirag an dour binniget,

Ha born pep-hini digor.

Hi a chom eun tam a-zav,

Strafilh ouz pez en em gav ?

N'eo ket, hep mar !

Me a ginnig dour d'ezi,

Hi a bleug d'am bennozi

Gant sell dous helavar.

Hag ar zell-ze a welan,

He zell, eur zell ar gwellan,

Sell a c'hlanded ;

Ha sonj an dour binniget,

Pell a zo d'ei kinniget,

A vag c'hoaz evurusted.

Evurusted hag envor

Eur plac'hig eus an Arvor,

Karantezus ;

Tener taolen evelse

Sonj ho peus a gement-se,

O mora'hig ken mousc'hoazus ?

Evurusted hag envor  
Eur plac'hig eus an Arvor,  
Karantezus ;  
Tener taolen evelse  
Sonj ho peus a gement-se,  
O merc'hig ken mousc'hoazus ?

EOSTIG